

Lenora.

(64, suite)

Lenora, da boent strinc an deiz,
 Spontet gant eun urre direiz,
 A griez : Guillem, mignon qez !
 Na te zo beo, pe yen er bez ?
 Varlerc'h e Roue en oa et, (65)
 D'ar brezel pell.... Na guer ebet
 N'en devoa scifet d'e vestrez,
 Na testeni a garantez.

Êchuet e peb cassoni,
 Hac ar peoc'h oc'h unani,
 Adversourien a deu tîmat
 D'en em garout a galon vad.
 Soudarded, sammet a lorc
 Eus an eil vrô hac eguile
 A zistro oll ceder d'ar quër,
 Gant taboulin ha trompill selër.

D'o diarben an oll a red
 Gant levezeg ha hast meurbet
 Ouz guerezjou levez ar zoudard
 Laouen e tiscan ar vombar.
 An tad, ar mab, mignon, pe vreur,
 Pocât, briatâ, quella vreur;
 Gant bennoz evit eur seurt graf,
 Lenora griez ebet, siouas !

Languet a velconi, e sell (64)
 Ouz ar re deut dioc'h ar brezel.
 Eus e Guillem e ra goulen;
 Bez na respont ouz e feden:
 Tremen a ra ar rencou clôs,
 Ha tremen mat bete ser-nôs;

Hi a guerezas var ar pave,
 Ha gant e foan en em neze.

He mam a zired d'he zével:
 Va merc'hic pasour ! ret eo tével;
 He as priatô, ha goude
 Assembles e pedfomp Doue.
 — Oh ! va mam guer, me zo mantret:
 Petra din pelloc'h dal ar bed ?
 Doue em andret zo cruel:
 Reuz ha maleur var ho puguel.

— Bezit, Autrou, carantegus
 En hor c'hever-ni truezus.
 Ped calonec ouz da grouer,
 Na sello ouzomp c'hoas tener.
 — Esperout ? ze zo nul, va mam: (65)
 Ar beden ne zervicho tam !...
 Pedet an eus gent an deiz-mâ:
 Petra 'dal adpedi bremâ ?

— Euz Tad mat eo Doue an êe,
 Prest da zicour e rugale.
 Deomp da gaout eur bîleg santel,
 Da barea da boaz marvel.
 — An tîn-goall a zo en c'halon
 Na vougo get gant eur zerrmon !
 Dour an Ilis zo didalvez
 Da derma tud dioc'h toull ar bez !

O, Guillem ! piou a lavarfe
 En Hongri n'en deus, marteze
 Tolet e lagad var un all ?

deh-tân da vont, an trufler fall !
 Divoeret dez !... tec'h diounta,
 E bec'het a chommo ganta ;
 Hac an traitour, pa dremenno,
 E ziglealdet er flemmo .

- (66) Va mam quèz ! goude eur seurt coll,
 Netra na chom, echuet oll !
 Ro. bell a meus tennet alan :
 Pennos var heur va dremenwan !
 Eur c'hoezaden eus an ancou
 Da vouga va mouchic goulou !
 Rac varnôn-me Doue a sco
 Didruerz evel eur bourneo .

— Va Doue, leun a vadelez,
 Pardonit he zempladurez !
 Gouzout a rit, he goal feden
 A zeu abers tân he derrien ...
 Ha te, plac'h paour ! renong a grenn
 Da amouroustet eur payen ;
 Tro da galon varzu an êe,
 Erit pried gemer Doue !...

— Ifern, Barados, m'o c'hemer
 Nul da zoulaji va mizer .

Guillerm voa Barados dain-me :
 Buez heptân ifern a ve .
 Buez reuzendic, moue eta
 Er pûn difonç eus a netra !
 Fae d'ar bed hep va mignon qez
 Fae d'an êe hep e garantez .

(67)

En daill-ze, gant e dizesper,
 En em quemer ouz he c'hrouer,
 O clem enpad an devez oll,
 Dre voal bedenno e tioroll
 Demeus e c'halon tenn-rannet.
 D'an heur ma tarzaz ar stered
 Tachou alouret en oabr glas,
 Ar pec'het ruiz a zortias .

Ger buan eun drous a glêvas
 Trop, trop... commejou eur marc'h bras,
 Eur marc'hec a zo dispenet ;
 Gant houarn selant ruiz eo guirget ...
 Cloc'hic an nôr eus e chaden
 A dintas gant eun hijaden ;
 Brêmân eur vouez anavezet
 Dre doull an alc'houez a reget :

- (68) — Digor, va c'hez, digor afo !
 Lousget out ? pe beo, pe varo ?
 Penos e mât da galon baour ?
 Trist pe leal evel an aour ?
 — Petra ? Guillerm ! qez direza !...
 A belec'h e teues brêmân ?
 Me meus scuillet daelon c'hoetro,
 Gant aon na vijes-te maro !

— Eus a Vohem, eus a bell brô
 Gouscoude cede me distro .
 Diveat voa pa deus en rout.
 Lenora ! vit qementse tout
 Varc'hoas e vezimp eureujet .
 — Chom da loja var va oalet.
 Seladou an avel o suta !
 Deus em c'hichen, me da domma .

— List an avel hac e goumar,
 Treid va marc'h a vress an douar
 Gant ar press da dec'het d'ar quèr .
 Va c'hentrou dir a storloc sclêr .
 (69) Gra eul lam cloc var an dorchon ;
 Va marc'h du evel mouaren,
 En deus trêgont lêo da ober
 Qen en om rento eur maner .

— Daoust hac en ger bêr amzer
 Et'h ouffe da varc'h du ober
 Trêgont lêo ? An nôs zo bouc'het,
 Rac unnez heur a zo setet .
 — An ancou ha ni ya buan

Hac al loar n'en dē qet bian.
 Varc'hoas vintin, en hor goele,
 An eol a baro varmout-tē.

— Pelec'h e m'ân da vaner-tē?
 — Pell, pell e m'ân. — Nac hor goele?
 — C'hoec'h plangen ha daou blangennic,
 Eur goele fresc ha sioulic.
 Tr'as avoalc'h din-me da c'hourvez;
 Franc ē evit daou assambles.
 Lam arze pront, ha partionp :
 Ar banquet a hed ac'hanomp.

Senora zo lanmet dioc'h-tu (70)
 Seân var dailler ar c'hourser du.
 Hac e stard, a nery e divrec'h
 Evel eur scoden var eur bec'h.
 Trop, trop; hourra! quis d'an avel
 E qery marc'hec ha demezel.
 Diourz ar bili e strinc an t'ân
 Dindan treid ar c'hourser du-brân.

A gleiz, a zê, dre ma qerront,
 Coat, dorguen, traonien a lezont.
 Gant ar strong eus o c'hammejou,
 E cr'ân ar veil bolz er pontjou
 Hourra! an ancou a ya pront;
 Al loar a zo huel duhont.
 — Aon ac'h eus rac an dud varo?...
 — Perac e comzit anezo?

— Clêvet a res er c'hoat tefal
 Ar brini doanins o coagal?
 — Clêvit ar c'hanticou a gaon,
 De profundis d'an anaon?
 Euy entêramant eo, me gret: (71)
 Selaou!... ar c'hloc'h a zo tintet.
 Ar c'hân pounner euz ar sacrist,
 Evel c'ân ar glesger zo trist.

Pa verzo tremenet an n'ôs,

Cassit ar c'horf-ze da repos;
 Ar plac'hic-mâ vo va itron:
 Hi e deus choazet ac'hanon.
 Canerien, chenchit canticou,
 Canit hymn an demezion.
 List arze ho Miserere,
 D'hon eurenji, autrou curé.

Qer pront eo tec'het an c'archet,
 An hymn a gaon a zo trec'het.
 Oll, var gomz ar c'havalier ere,
 Oll ha peb-unan a quere.
 Folla ra ar marc'h goassoc'h-voas,
 Trec'h d'an avel en e dis bras;
 Dioc'h ar bili e strinc an t'ân
 Dindan treid ar c'hourser du-brân.

A gleiz, a zê, dre ma qerront, (72)
 Coat, dorguen, traonien a lezont.
 Evel en oabl, al luc'hed ru
 A daryz hac a dremen dioc'h-tu.
 Hourra! an ancou a ya pront;
 Huel e m'ân al loar duhont.
 — Spont ac'h eus rac an dud varo?
 — Tao, Guillermin qery: lez anezo...

Dindan postou du ar gibet,
 El lec'h ar muntrer ve crouquet,
 Eur strollad a sperejou louz
 A ebatê hac a rê trouz:
 Geffion ifern, deut var hon lerc'h
 Da eured houmâ, coanta merc'h;
 Deut da enori hon eured
 Gant jabadao ar c'horriquet.

O tilezel ar gibet du,
 Var e gomz e nijont dioc'h-tu,
 Gant trouz an deillon dizec'het,
 Dre avel mision du sculet.
 Folla 'ra ar marc'h goassoc'h-voas, (73)
 Trec'h d'an tourmant en e diz bras.

Dio' h ar bili e strinc an tã
Dindan treid ar c'hourser du-bran.

Oh ! buan e chom ar mene
Adre qein an daou lammer-ze !
Ar stered na peguer buan
A dec'h evel seizennou tã.
Hourra ! an ancou a ya pront,
Hac al loar zo huel duhont !
— Spont ac'h eus rac an dud varo ?
— Tao, Guillerme quèz !... lèz anezo.

Starda ! bec'h atao, Faout-avel,
Me gant flêr an deiz o sevel,
En horolach neus mui a drèz,
Cân ar c'hilloc a glêvân frèz.
Dija e velan er maner
Eur gêle fresc d'hon diquemer.
Laret e meus : buan a ya
An ancou hac e zamm gant !

(74) Dirac an nôr ez int hallet
Gant morailloù houarn prennet.
Dre eur tol eus e vouialen
Evel gêr o bruzunas crenn.
Ar vuduren squilthuz a dro,
Al loar sclêrijen ruiz a ro ;
Neuze e voeljont er vèret
Mein-bez gant an amzer livet.

Pebes burzud ! cetu souden
Juppen-arm Guillerme o tispén,
A dam-a-dam eo disillet,
Hac en ludu eo pulluc'hét.
E benn, divlêo !... eur ascorn quén,
E oll izili digroc'hén.
En e zorn scarmillet e talc'h
Eur horolach triez hac eur falc'h.

Ar marc'h a zav en e za sonn ;
Strinca ra goad diouz e diffronn.
En douar, faoutet dindanna
(75) E quèz Cetu grêt aneza.
Dio' h fonz an toull, eur gamm ponner
A zav qen na hejas an aer.
Entre an ifern hac an êe
Ar plac'hic paour a hirvoude.

Hac endro dezi an teuzet,
O clasq an dang o deus canet
Ha discanet eur gandraouen,
Gant comzou doanuis evellen :
Gourzanvit poanniou ar bed-mâ,
Hez goal-bedi d'ar re rusta.
Tolet varnoc'h abers Doue.
Ho corf zo poultu !... Graç d'hoc'h ene !

fin. M. de Goësbriand. 1849.

extrait de Goëthe.

(Vol. VII, p. 64-75)
strophes non numérotées.

[Il y a deux fois les pages 64 et 65]